

# Salm 92

A. Bodennec



Ao-trou eo Je-zuz Krist, Dou-e eo en e c'hloar.

## SALM 92

**Aotrou eo Jezuz-Krist :**  
**Roue eo en e c'hloar.**

Roue eo an **Aotrou** ;  
Kaer e wisk**amant**,  
A nerz 'neus en em wisk**et** an Aotrou !

Diazezet mad eo ar bed, ha **divrall**,  
Diazezet ho trôn a-vis**koaz**,  
A-vis**koaz** ez oc'h !

Krenvoc'h e-ged mouez an doureier **braz**,  
Splannoc'h e-ged mouez an tarziou-**mor**,  
Eo splann an Aotrou e **lein** an neñv.

Sur-meurbed eo hoc'h **urziou** :  
Ouz ho ti e tere ar zante**lez**,  
Aotrou, a-**hed** an deiziou.